

Ar serjant major

YF_0130_Galv

Salut dit 'ta kamarad on-daou pa 'z omp en em gavet
Deomp da ganan un abadenn pa n'omp ket evit miret

Ni a gano, a zanso, n'om vahato on-daou
Evel daou bodad rousin o virvin war ar glaou

Gavotenn

Tud yaouank deus ma 'farrez, didostit me ho ped
Da zilaou kan ar vuhez a zo ganin erruet

Me a zo ur serjant major tistroet deus an arme
Rejouiset ma c'halon oc'h antreal e-barz ar vro

Ha pa oan-me partiet da gomans ma c'honje
Am-boas laosket war ma lec'h 'objet' ma c'harantez

Am-boas laosket war ma lec'h fleurenn ar yaouankiz
Evit mont d'ober kampagn en tu all da Baris

E-pad pevar bloaz hanter on bet er rejimant
He-deus graet ma c'holl chagrin ha ma brasan tourmant

Ha bep nozh ha bep mintin, war an deiz alies
Ma spered-din a nije betek ti ma mestrez

Ma spered-din a nije betek ma bro beniget
En ur sonjal en enni bep eur ha bep moment

C'hoarveal a rae ganin e-giz gant an durzunel
Pa vez kollet ganti he 'far, hi en em daol da vervel

Ha ganeomp-ni tud yaouank a c'hoarvez memez-tra
Glac'haret oa ma c'halon o tonet da bartian.